




# **ken vreuriez AR BREZONEG**

TAOLENN an NIVERENN 29

1. Eun enklask war al lidêrêz e brezoneg.
2. Sakramant ar Briedelez - kenta lodenn I - I5

Amañ e vo kavet al lidou evid Sakramant ar Briedelez.  
En niverenn a zeu e vo enbannet ar peur-rest:lennadenn-  
ou ha salmou.

Evel-se,gand framma goude-ze an diou niverenn en unan,  
ho-po al levrig-se penn-da-benn,evid lida Sakramant ar  
Briedelez.

3. Pedennou evid overennou : 3Ied,32,33,34.  
Sulioù war ar bloaz I<sup>3</sup> 2<sup>3</sup>
4. Salmou gand Mab an Dig I<sup>I</sup> I<sup>8</sup>

.....

Troidigeziou aotreet da arnod evid  
an Eskopti a-berz an Aotrou F. Barbu,  
eskob Kemper ha Leon.

Kemper d'an 10/10.1973

Visant Fave,eskob-skoazeller.

Eun enklask war al lidêrêz e brezoneg

C'hoant a zo savet ganeom da houzoud peseurt implij a zo bet grect euz kemmadurez an Aotrou 'n Eskob war ar brezoneg el lidêrêz er-bannet eiz vloaz 'zo.

Eur follenn-enklask a zo bet kaset da beb kanton. Setu eh ouzom en eun doare klok awalh penaoz ema kont er bloavez 1973. Eñ embann a raim war ar Hairou, kanton dre ganton, azaleg an niverenn a zeu. Ar SEMAINE RELIGIEUSE euz an 20 a viz even he-deus gouestlet 32 pajenn d'ar gudenn-se. Diêz eo eta lavared ne vefe ket an Aotrou 'n Eskob a-du gand al labour a reom; diouz an tu-ze, n'eus skoill ebet; e-leh ema an dalh!

Kevreureiz ar Brezoneg

000000000000000000

Deuet eo ar mare da gomananti endro.

An niverenn 28 a oa dezi beza an diweza euz ar 6 niverenn prometet. Eñ a reom an niverenn-mañ (N°29) war ar marhad. Ar rummad nevez a gomanso gand an niverenn 30, med ne vo kaset nemed d'ar re o-do paeet o houmanant.

Ar priz a zo 15 lur evid 5 niverenn (30-34). E hellit kredi ne hounezom ket. N'om-eus nemed eur hoant: gweled niver or houmananterien o kreski. An darn-vuia o-deus roet ouspenn ar gont warlene hag evel-se om eus gelllet embann en eun doare kaer al levrou T ha B. Chom a ra ganeom eun neteud mad a skouerennoù. Emichañs ne jomint ket da louedi. N'om ket dre-ze displeg ouz om dle, med fiziañs a jom ganeom.

Er bloaz-mañ, om-eus c'hoaz beh da gaoud oh embann al LEVR-OVERENN (ennañ ar pedennoù, prefasoù, lidoù evid oll zulioù ha gouelioù braz ar bloaz) hag al levr C, da veza implijet azaleg sul kenta an Azvent. Goulenn a reom diganeoc'h eta beza brokuz: lakom om-do 8 000 lur pe 9 000 lur da ziyalha ha c'hoaz ar re a voutlo an dachu levr-se: an Aotrou Broc'h, person Sizun evid al levr-overenn, hag an Aotrou Abjean evid al levr C, ne houlennont nemed o mizou heb mui ken.

Petra embannim er mizioù da zond?

Da genta, SAKRAMANT AR BRIDELEZ, a vo kavet en e bez en diou niverenn da zond euz ar haierou. Warlerh kement a zo red evid: PEDENNOU EVID AN ANAON. Pell 'zo emaez ouz o goulenn diganeoc'h. A-hend-all e karfem roul-la eul levrig all, gortozet en ivez: LEVRIG-OVERENN AN DUD FIDEL, gand eur bern mad a gantikou nevez. Karoud a rafem e voutla ha n'eo ket e hour-voutla, skanfoh e vo hag êsoh da horrenn. Bezit eta brokuz! Kas an arhant da Job Seite, Skol an Aod, 29249 Guissény - CCP 1738-66 Rennes

an tenzerier : Job Seite

Goulennit diganeoc'h: KOMZ DOUE EN OVERENN :

LEVR T : 30 lur - LEVR B : 20 lur

Dindan ar wash:

KOMZ DOUE EN OVERENN : LEVR C : 20 lur  
(da veza implijet azaleg Sul kenta an Azvent)

LEVR-OVERENN : (Pedennoù, lidoù, Prefasoù evid sulioù ha gouelioù braz ar bloaz)

## S A K R A M A N T A R B R I E D E L E Z

### I. LODENN GENTA : lidou ha pedennou

Da genta, ne vo ano nemed euz ar zakramant lidet e-doug an overenn.  
Goude e vo kavet an doare-lida pa ne vez ket a overenn.  
An niverennou a zo laket eo ar re a gaver er ritual galleg (1969)

#### An degemer en iliz.

#### Ar beleg - a ra degemer - d'an dud hag a zalud anezo.

Ma 'z a ar beleg en arbenn d'an dud beteg porched an iliz, e ray e hourhemennou dezo evel pa zegemerer mignoned en eun ti, goude ez a en o raog beteg penn-uhella an iliz.

N'eus forz penaoz, goude ma vo deuet an oll en iliz, ar beleg a bign ouz an aoter ha troet war-zu an dud e salud anezo gand eun nebeud komzou evid o lakaad e stad da gemer perz ervad er bedenn hag el lidou sakr.  
Amañ war-lerh meur a zoare prezegennig hag a heller da lenn evel m'emañ. Ar beleg a hell ivez sevel unan bennag all euz e benn e-unan.

#### N° IO (hervez ar ritual roman, N° 23)

I/ Va mignoned, (peñ... hag N...), c'hwi a zo o vond da veza eureujet, deuet oh d'an iliz, evit ma vo siellet ho karantez, merket evid atao gand eur zin sakr a-berz Doue, dirag ar beleg ha dirag ho tud.

An Aotrou Krist a daol puill e vennoz war ar garantez-se.

Evid sikour ar priejou da jom fidel bepred an eil d'egile ha da zougen asamblez deveriou o stad nevez, e ro Doue d'an dud badezet grasou eur zakramant savet a-ratoz-kaer evid an dra-ze.

(Ni oll bodet endro deoh a zo o vond a-unan ganeoh, da zelaou Komzou Doue, da bedi evidoh ha da gemer perz ganeoh e Sakrifis an Overenn)

2/ N... hag N..., eüruz on ouz ho tegemer, en ano an Iliz, c'hwi, ho tud hag o mignoned. Ar garantez etre priejou a zo benniget gand an Iliz.

Bezit soñj penaoz eo diwanet ar garantez-se en ho kalonou, penaoz eo eet war gresk. Gand ar garantez-se ema Doue ennoh. Doue a zo Karantez.

C'hwi 'zo mignoned da Zoue, deuet d'e drugarekaad euz ar vuez e-neus roet deoh ha da reseo grasou nevez.

Ni oll, amañ, bodet endro deoh a zo o vond, a-unan ganeoh, da zelaou Komzou Doue, da bedi evidoh ha da gemer perz ganeoh e Sakrifis an Overenn.

#### N° II

#### 3/ (komz a heller ivez d'an oll en iliz)

Va breudeur, setu ni bodet en iliz, endro da N... ha da N... a zo o vond da eureuji. Eun dervez braz, eun dervez leun a joa eo hemañ evito; deuet om da ziskouez dezo or harantez hag or mignoniaj, da gemer perz ivez en o levenez.

Deuet om ouspenn da bedi Doue ganto hag evito.

Vad a ray deom selaou da genta Komzou Doue.

Goude-ze, e vo unanet ar priejou gand Sakramant ar Briedelez.

Fa ni a bedo, gand an Iliz a-bez ha dre Jezuz Krist, or Zalver, da houlenn digand on Tad euz an Neñv, ober degemer vad d'an daou bried, o benniga hag o delher unanet evid ar vuez.

4/ (ar homzou-mañ a zere gwelloh, pa vez unan euz an daou zen yaouank stag ouz eun Ilizha n'eo katolik)

N...hag N...,ni amañ bodet endro deoh da gemer perz en ho levenez.

Doue e-neus ho krouet hag ho kalvet dre hoh ano,hag e-neus greet deoh kreski en e garantez.

En eo e-neus greet dech en em anaoud an eil egile ha lakeet ar garantez da ziwan etrezoh.

C'hwi 'zo mignoned dezañ ha setu perag e teuit da houlen digantañ deski deoh penaoz en em gared e gwirionez,da reseo ivez digantañ ar grasou a fell dezañ c'hoaz rei dech.

Oll asamblez,e trugarekaom Doue an Tad,En hag a ro diazez da beb tiegez.

A-unan ganeoh,eom bremañ da zelaou Komzou Doue

ha da bedi on Tad euz an Neñv evid ho familh nevez emach o vond da zével.

Setu amañ steuennou all da zikour ar re a garfe sevel o-unan ar homzu-degemer:

a) Eun deiz braz eo hemañ evidoh.

Endro deoh ho tud,amezeien,kristenien all,ar beleg...o kemer perz en ho levenez

An Iliz a zo ivez laouen o rei degemer d'ho karantez,o pedi ganeoh hag evidoh,o trugarekaad Doue.

Doue a zeu d'ho sikour dre sakramant ar briedelez.

b) Ho kalonou a drid gand al levenez;ni ivez hag an Aotrou Krist a gemer perz en ho joa.

Ar garantez a very en ho kalonou a zo evidoh eun dra gaer-dispar:gouzoud a rit n'eo ar garantez-se nemed eun elfenn euz karantez Doue-silet en ho kalonou,ha Doue a fell dezañ lakaad anezi da greski en eur ober anezi eur zakramant.

c) Peb-hini ahanoh a zo eet beteg bremañ diouz e du .Soñjit en ho familh,ho labour,ho karter,ar yaouankizou all ho-peus darempredet,ho puez a gristen...

Deuet eo ar mare da drugarekaad Doue euz kement e-neus greet evidoh ha kement e-neus soñj rei deoh en amzer da zond.

d) Doue a halv hag a zastum en e Iliz ar re oll e-neus,soñj lodenna ganto e hrasou. C'hwi a zeu ivez,en devez-mañ ken talvouduz evid ho puez da lavared dezañ bennoz ha trugarez ha da houlen digantañ benniga ar garantez a verv en ho kalonou an eil evid egile,ha war ar promesaou kaer lakaad 'vid mad eur ziell.

#### An overenn

Bremañ e stag ar beleg gand an overenn evel kustum.

#### KAN AN DIGOR

Ra blijo gand Doue ho sikour ha beza bepred ho skoazell.

Ra blijo gand Doue rei deoh ar pezh a glask ho kalon ha digas da vad kement a es perit.

#### N° 15 - PEDENN AN DIGOR (da zibaba)

1/ Pedom...

Aotrou Doue,c'hwi ho-peus santelleet ar Briedelez beteg ober anezi eur zin euz al liamm a zalh unanet etrezo an Aotrou Krist or Zalver hag an Iliz Santel.

P'ema N...hag N...o vond da reseo ar Zakramant-se gand feiz,

roit dezo ar hras da veva bende gwelloh ar pezh m'eo ar zakramant ar zin anezañ.

Dre Jezuz Krist,ho Mañ hag on Aotrou,beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,a-viskoaz da virviken.

AMEN !

2/Pedom... (N° 16)

Aotrou Doue,selaouit or pedennou.

Plijet ganeoh,en ho madelez,taoler grasou puill war N... ha N...

Pa 'z int deuet dirag hoh aoter d'en em rei an eil d'egile er Briedelez,lakit o harantez da greski bepred.

Dre Jezuz Krist...

N° I7

3/ Pedom...

Aotrou Doue oll-halloudeg ho pedi a reom evid N...hag N....a zo o vond d' en em unani dre Zakramant ar Briedelez .

Grit dezo kreski en o feiz ha grit ma roint d'an Iliz bugale hag a vo kristenien vad d'o zro.

Dre Jezuz Krist...

N° I8

4/ Pedom...

Aotrou Doue, en eur groui an den gwaz ha maouez, eo bet plijet ganech e vefent unanet dre ar Briedelez.

Grit 'ta neuze ma vezo unanet dre eur garantez wirion N...hag N...deuet amañ da eureuji..

Roit dezo ar hras d'en em gared en eur veva n'eo ket avad peb-hini evitañ e-unan, med an eil evid egile, ma vezint evelse, en on touez, eur zin euz ho karantez deoh-hwi. Dre Jezuz Krist...

LID AR GOMZ

Kavet e vo pelloc'h eun nebeud pennadoù da lenn, tennet euz ar Skritur Zakr. Lennet e vo unan tennet euz an Tewtamant Koz pe euz Liziri an Ebestel, unan all euz an Aviel.

Ma vez divizet ober teir lennadenn, ar genta a vo euz an Testamant Koz, an eil euz Lizer eun Abostol, an drede euz an Aviel.

Pennadoù all estreged ar re embannet el levr-mañ a hellfed da gemer, m'o defe an dud nevez pe ar beleg abegou mad d'henn ober.

Unan euz ar pennadoù a vo atao ano emañ euz ar briedelez, egile a hellfe beza dibabet evid diskleria d'an dud nevez ha d'an oll dud en iliz, kenteliou war ar vuez kristen.

Evid an dilab lennadennou eo mad d'ar beleg en em glevet gand ar re a zo o vond da eureuji.

Kavet e vo etre peb pennad lenn.

Awechou, en eurejou heb overenn, e vo kavet gwelloc'h, hervez an doare tud a vo en iliz, chom gand eur pennad-lenn helken hag eur ganenn da heul. Mad e vefe neuze displega eun tammig ar pezh emañ o vond da glevet araog staga da lenn.

Ar brezegenn a zeuio endro war ar pezh a vo bet lennet hag a zisplego kelennadurez an Iliz war Zakramant ar Briedelez. Sikour a ray evel-se tud an eured da intent gwelloc'h, hag an dud nevez da veza e gwelloc'h stad da ober o fromesaou.

## L I D O U L A R Z A K R A M A N T

Echu al lennadenn (hag ar brezegenn) emañ tro al lid-eured end-eeun.

An oll a zo pedet da zevel en o zav hag ar beleg a ya dirag an daou zen nevez.

N° 2I-22

I/ Diviz kenta gand an dud nevez

Ar beleg: N...ha N..., selaeuet ho-peus Komzou Doue e-neus diskleriet d'an dud petra eo en em gared etrezor ha petra eo ar briedelez.  
Bremañ emañ o vond da rei ho kêr an eil d'egile.  
Lavarit hag euz ho penn hoh-unan eo, heb na ve d'eo o poueza warnoh?

an dud nevez (asamblez pe an eil goude egile) Ya !

ar beleg Emañ o vond da brometi chom fidel an eil d'egile.  
Lavarit hag evid ho puez penn-da-benn eo ?

an dud nevez Ya ! (evid or huez penn-da-benn)

ar beleg Eur famill nevez emañ o vond da zevel. Lavarit ha kemer a rit ar garg a briedjou hag a gerent kristen ?

an dud nevez Ya ! (evel-se emañ or zoñj)

un doare all:

ar beleg d'an oll en iliz: Va breudeur, (ma ne vefe ket a dud en iliz, lavared nemedken: N...hag N..., selaouet on-neus...) a-unan gand N...ha N..., on-neus selaouet Komzou Doue, e-neus roet da anaoud petra eo e gwirionez ar garantez etre daou bried.

Daou zen uyaouank, pa zimezont, a dle henn ober euz ho fenn o-unan, heb ma ve pouezet re warno, a bromet beza fidel an eil d'egile 'hed o buez, ha beza prest da vi-red deveriou o stad nevez a briedjou, (a dad hag a vamm) (ma vefe deuet war an oad an dud deuet da eureuji, e vefe lezet ar geriou-ze a-gostez)

Trei a ra neuze ar beleg war-zu an dud nevez:

- N...hag N...; daoust hag evel-se eo ema ho soñj beva er stad ar briedelez ?

an dud nevez (asamblez pe an eil goude egile)

- Ya! (evel-se ema or zoñj).

## 2/ Pedet eo an dud nevez da rei o asant.

Ar beleg a houlenñ digand an dud nevez rei o dorn an eil d'egile ha rei o asant dre unan pe unan euz an doareou-mañ:

ar beleg

- a) Peogwir ho-peus greet ho soñj, roit ho torn deou an eil d'egile ha diskleriit dirag Doue hag an Iliz ho polontez d'en em gemer an eil egile da bried.
- 25 b) Dirag an oll amañ diredet, roit ho torn deou hag hoh asant an eil d'egile.
- 26 c) Dirag Doue, a zeu anezañ peb karantez, hag a vo dallmad ganech d'ho sikour, roit ho torn deou hag hoh asant an eil d'egile.
- 27 d) Evid ma vezoh unanet en Aotrou Krist hag evid ma teuy ho karantez, santelleet gantañ, da veza evid an dud euz zin euz karantez Doue, dirag an dud Bodet amañ, roit ho torn deou hag hoh asant an eil d'egile.

## 3/ Rei a reont o asant.

Pa vez meur a eured asamblez, al lodenn-mañ (rei ha réseo an asant) a vo greet evid peb koublad, an eil goude egile. Ar rest a vo gallet ober evid an oll goubladou asamblez.

dre " C'Hwi

dre " TE "

an den nevez:

N...hag asanti a rit beza va gwreg?

N...hag asanti a rez beza va gwreg ?

ar plah nevez:

Ya! (asanti a ran beza ho kwreg)

Ya! (asanti a ran beza da wreg)

Ha c'hwi, N..., hag asanti a rit beza va gwaz ?

Ha te, N..., hag asanti a rez beza va gwaz ?

an den nevez:

Ya! (asanti a ran beza ho kwaz)

Ya! (asanti a ran beza da waz)

ar plah nevez

Ha tegemer a ran da waz  
hag en em rei a ran deoh.

Da zegemer a ran da waz  
hag en em rei a ran dit.

an den nevez:

Ho tegemer a ran da wreg  
hag en em rei a ran deoh

Da zegemer a ran da wreg  
hag en em rei a ran dit.

o-daou asamblez: Prometi a reom chom fidel an eil d'egile,el levenez hag er boan,  
er yched hag er hleñved hag en em zikour an eil egile a-hed or  
buez.

30 eun doare all:

an den nevez:

N...,hag asanti a rit beza va gwreg?

ar plah nevez:

Ya,(asanti a ran beza ho kreg)

Ha c'hwi,N...,hag asanti a rit  
beza va gwaz ?

an den nevez:

Ya!(asanti a ran beza ho kwaz)

N...,ho tegemer a ran da wreg  
(pe:da hwreg)hag en em rei a ran  
deoh evid ho kared da vad 'hed or  
buez.

ar plah nevez:

N...,ho tegemer a ran da waz  
(PE da lwaz) hag en em rei a ran  
deoh evid ho kared da vad 'hed or  
buez.

N...,hag asanti a rez beza va gwreg ?

Ya!(asanti a ran beza da wreg)

Ha te,N... hag asanti a rez beza va gwaz?

Ya!(asanti a ran beza da waz PE da hwaz)

N...,da zegemer a ran da wreg PE da hwreg)  
hag en em rei a ran dit evid da gared da  
vad 'hed or buez.

N...,da zegemer a ran da waz(PE:da hwaz)

hag en em rei a ran dit evid da gared  
da vad 'hed or buez.

30 bis amañ e lakom dioustu un doare all berroh ha êsoh evid an dud  
nevez ma ne vefent ket e tu da gemer hini pe hini euz ar re all.  
(a gaver el levr galleg p.47)

ar beleg:

Dirag ar re oll a zo amañ bodet ha dirag Doue...

PE: Dirag Doue,a zeu anezañ ho karantez

hag a jomo lepred ganeoh;

dirag ar re oll a zo amañ bodet...

d'an den nevez:

N...,hag asanti a rit(PE a rez) kemer N...,da bried,evid he hared da vad ha feal  
atao en eürusted hag er boan,a-hed ho puez (PE:da vuez) ?

an den nevez:

Ya! (asanti a ran)

d'ar plah nevez:

N...,hag asanti a rit(PE a rez)kemer N...,da bried,evid e gared da vad ha feal  
atao,en eürusted hag er boan,a-hed ho puez ?(pe:da vuez) ?

ar plah nevez:

Ya ! (asanti a ran)

4/ Ar bedenn

3I-32

Ar beleg,e zorn deou astennet war an daou bried,a lavar:

a) Poet ho-peus ho kêr an eil d'egile dirag an Iliz.Plijet gand Doue startaad  
hoh asant ha skuill warnoh puill e vennoziou.Pedit bremañ ha trugarekait Doue evid  
ar grasou kaer ho-peus resevet.(Chom sioul eur pennad)

ar beleg c'hoazi.

33

Ha bremañ,oll asamblez,tud nevez,testou,kerent ha mignoned,lavarom bennoz da  
Zoue !



Amañ eur han berr, da skouer, war don braz ar meuleudiou war-lerh bennoz ar Zakramant:

diskan: Meuleudi da Zoue ! Meuleudi d'e Ano Santel !

Braz eo bet e vadelez evidom ! Meuleudi...  
Enor ha gloar da Zoue da virviken ! Meuleudi...

pe: Kaer ha plijuz meurbed...

pe: Karom Doue da genta, kristenien...niv.10

## 5/ Da venniga ar gwalennou-eured

35

- a) Plijet gand Doue benniga ho gwalennou-eured ha mired bepred en ho kalonou eur garantez tener ha divrall. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

36

- b) Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus greet engleo ganeom dre or Zalver Jezuz Krist, plijet ganeoh benniga ar gwalennou-mañ.

Da N...ha N... hag o dougo war o biz, roit ar hras da veza fidel a-grenn an eil d'egile bepred. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

- d) Aotrou Doue, plijet ganeoh benniga N...ha N...hag o zantellaad en o harantez Peogwir eo ar gwalennou-mañ eur zin euz o harantez da badoud, grit ma tigasint da zoñj dezo e tleont en em gared an eil egile. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

- c) (Pa vez dija ar gwalennou ganto war o biz)

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus greet engleo ganeom dre or Zalver Jezuz Krist plijet ganeoh benniga ar gwalennou-eured-mañ ha rei da N... ha N...ar hras da veza bepred fidel a-grenn an eil d'egile. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

38

Ar priejou a laka ar gwalennou an eil var biz egile. Lavared a hellont:

ar gwaz: N..., rei a ran deoh (PE:dit) ar walenn-mañ, merk euz or harantez hag or fealded.

ar wreg: N..., rei a ran deoh (PE:dit) ar walenn-mañ, merk euz or harantez hag or fealded.

39

ar beleg a hell echui evelhenn:

- a) N..., ha N..., bevit bremañ el levenez, en eur en em gared an eil egile evel m'ho-peus prometet.

- b) N..., ha N..., en em garit an eil egile evel m'e-neus Jezuz Krist karet an Iliz.

Amañ e hell ar priejou nevez lavared eur bedenn savet ganto pe c'hoaz unan pe unan euz an diou bedenn-mañ.

PEDENN AR PRIEJOU NEVEZ

I/ Aotrou Doue, setu sevenet ar pezh a boulennek diganeoh.

C'hwi a ro deom sikour ho karantez evid harpa on hini; ho trugarekaad a reom, ken kaloneg an eil hag egile.

Ennoh e lakom or fizianz evid ar vuez nevez emaeom o vord da ren assemblez.

Goulenn a reom diganeoh kendelher d'or skoazella beteg peun diweza an hent or harso d'ho Rouantelez.

2/ Aotrou Doue, galvet ho-peus ahanom da zevl assemblez on tiegez.

Roit deom ar hras da selher beo emañ tan ho karantez;

Ra vo frealzidigez evid ar re oll a vo ennañ o veva.

Ra vo on ti mad da zigemer kement hini a zeuio da glask ennañ frelazidigez ha sikour.

Deskit deom, Aotrou Doue,

kerzed war hent ar zantelez, an eil sikouret gand egile,

ober ho polontez 'hed or buez,

goulenn kuzul diganeoh evid ren mad or buez

ha konta bepred war ho skoazell,

kinnig deoh kement a vo laouen hag a boaniuz en or buez,

ren davedoh ar vugale a blijo ganeoh rei deom.

Aotrou Doue, c'hwil zo Karantez,

trugarez deoh evid ar garantez a verv en or halonou.

an oll a zo pedet da zevel en o zav evid lavared: ON TAD....

Goude e teu dioustu ar "Pedenn evid ezommou an oll"

PEDENN EVID EZOMMOU AN OLL

digor:

Va bredeur, bodet amañ endro da N....ha da N.....o-deus, bremaig dirazom, en em gemeret an eil egile da Bried. Deuet om da gemer perz en o levenez ha da drugarekaad Doue euz e vadelez en o heñver.

Pedom c'hoaz an Tad euz an Neñv evid ar priejou nevez, evid an Iliz Santel hag evid ezommou ar bed a-bez:

diskan: Selaouit, Aotrou Doue, pedenn ho pugale !

1/ Da genta, evid N....ha N...., nevez unanet er Briedelez, ma plijo gand Doue mired bepred beo ha birvidig o harantez an eil evid egile. Pedom ervad !

2/ Evid ma chomo ar priejou nevez stard en o feiz kristen ha mad ouz an dud a houlenno sikour diganto. Pedom ervad !

3/ Evid an Iliz Katolik, Pobl Santel bugale Doue, hag evid ar re a zo en he fenn da genta an Tad Santel ar Pab hag an aotrou 'n eskob, pedom ervad !

4/ Evid ma reno ar peoh dre ar bed, evid m'en em zikouro ar broiou, evid or bro Breiz, ma hello peb famill kavoud enni peadra da veva gand levenez, pedom ervad...

5/ Evid an oll famillou kristen, evid an oll briedjou a zo amañ; ma kavint endro gras ha joa o friedelez ken fiamm ha da zevez o eured, pedom ervad...

6/ Evid an Anaon, dreist-oll ar re 'zo kar d'an dud nevez, ma plijo gand Doue digeri dezo e varadoz, pedom ervad...

pedenn da gloza

Sellit gand madelez, Aotrou Doue, ouz ho pugale. Roit ho sikour dezo er stad a briedelez, bet savet ganeoh evid lakaad da greski gouenn an dud: pa 'z int bet unanet ganeoh, grit ivez ma vint saveteet gand ho sikour. Dre or Zalver Jezuz Krist.

PEDENN WAR AR PROVOU (unan pe unan, da zibab)

70

1/ Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober degemer-vad d'ar brovadenn a ginnigom deon evid ar priejou nevez unanet hervez lezenn zantel ar briedelez ha peogwir ez eo c'hwil ho-peus savet al lezenn-ze, plijet ganeoh beilla warni bepred.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

71

2/ Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad d'ar brovadenn a ginnigom deoh gand levenez. Beillit gand aked evel eun tad war ar re ho-peus unanet dre Zakramant ar Briedelez. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

72

3/ Aotrou Doue, selaouit gand madelez or pedennou. Plijet ganeoh ober digemer vad d'ar brovadenn a ginnigom deoh evid ar priejou nevez ho-peus unanet dre Zakramant ar Briedelez N.....hag N....

Dre hras an overenn-mañ, grit ma 'z ay war gresk bepred ar garantez etrezo hag o harantez evidoh. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

- An Aotrou Doue ganeoh ! Ha gand ho spered !

Ho kalon d'an uhel ! Troet eo war-zu Doue !

- Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou ! Just ha santel eo !

1/ Just ha santel eo, evid gwir, eun dra dleet ha talvouduz,  
lavared deoh on trugarez, Tad Santel, e peb leh hag e peb amzer,  
dre Jezuz Krist, ho Mab karet.

Felloud a ra deoh e vefe an union etre ar priejou  
eul liamm didorr a garantez hag a beoh.

Felloud a ra deoh e teufe da greski, dre an tiegeziou kristen, niver ho pugale,  
Aotrou Doue, evel-se eo e rit ho soñj evid silvidigez an dud.

Aze ema gras dispar ho sakramañchou,  
enno pinvidigez, war eun dro, evid mab-den hag evid hoh Iliz.

Rag kement krouadur a zeu war an douar a laka da greski kaerder ar Bed,  
ha pa vez ganet a-nevez er Vadiziant, da greski ivez ho Pobl Santel.  
Dre Jezuz Krist, on Aotrou.

Drezañ, a-unan gand an Elez hag an oll Zent, e savom or mouez da veuli ho kloar,  
en eur lavared da viken: SANTEL....

2/ Just ha santel...

Rag eun engleo nevez ho-peus savet gand ho pobl  
hag e brenet ho-peus dre Vister ar Maro hag an Adsao da Veo,  
evid ober dezañ kaoud perz e natur Doue en Aotrou Krist,  
ha kaoud lod gand or Zalver en ho kloar er Baradoz.  
Fellet eo ganeoh e teufe an union etre<sup>ar</sup> gwaz hag ar vacuez  
da rei da anaoud galloud dispar ho kras,  
hag e teufe ar Zakramant lidet hirio da zigaz da zoñj deom  
pegen burzuduz eo ho karantez.

SETu perag, a-unangand an Elez hag an oll Zent,  
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared da viken: SANTEL....

3/ Just ha santel...

Rag fellet eo ganeoh e teufe an den, krouet dre ho madelez,  
da dizoud ken uhel, ma vefe ar garantez etre priejou  
eur skeudenn euz ho karantez hoh-unan.

An den ho-peus evel-se krouet dre garantez evitañ,  
goulenn a rit digantañ heb ehan kared eveldeoh,  
evid rei dezañ lod euz ho karantez peurbaduz.

Meuleudi deoh, Aotrou Doue, rag Sakramant ar Briedelez,  
Hag a ro da anaoud deom ho karantez, a zeu ivez, war eun dro,  
da zantellaad ar garantez etre ar priejou,  
dre an Aotrou Krist, or Zalver.  
Drezañ, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,  
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared da viken: SANTEL...

Rag krouet ho-peus ar gwaz hag ar vaouez heñvel ouzoh,  
ha silet en ho halonou ar garantez o stag an eil ouz egile  
evid na vefe anezo o-daou nemed unan hebken.

Dre boan ha levenez o buez,a-hed o lod pemdezieg a skuizder hag a zudi,  
e lavarit dezo emaoñ en o hichen.

Dre o harantez hag o flanedenn bevet asamblez,  
e lakit da greski enno ho puez deoh-c'hwi hoh-unan,  
beteg an deiz ma teuoh da zigas da vad,e Jezuz Krist,ho Mab karet,  
kement a esperont.

Ha bremañ,pa zeu da bara dirag on daoulagad,  
eur wech muioh Mister ho karantez,  
e teuom da unani or meuleudi gand hini an oll dud eüruz  
a zo en ho kichen er Baradoz,evid kana hag embann: SANTEL...

HANC IGITUR (pa vez kemeret ar Bedenn-Veur I)

Plijet ganeoh,Aotrou Doue,,ober digemer vad d'ar brovadenn a ginnigom deoh,  
ni ho servijerien,ha ganeom ar priejou nevez hag ar re oll a zo deuet amañ  
da bedi evito.Peogwir ho-peus renet N...hag N...beteg hirio,deiz o eured,  
plijet ganeoh rei dezo(bugale hervez o hoant hag...)ar hras da veva hir amzer  
asamblez el levenez.Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

BENNIGADENN AR PRIEJOU

Echuet ar Batez,ar beleg ne lavar ket al"libera nos",med troet war-zu ar priejou  
e lavar unape unan euz ar pedennoù-mañ amañ warlerh:

Doare I

45

Pedom an Aotrou Doue evid ar priejou nevez.

Or Zalver Jezuz Krist ra viro ha ra gresko o harantez.

(chom a reer sioul eur prédig da bedi.Bez e .  
heller lezel a-gostez unan euz an daou bennad  
lizerennet A pe B)

47

A) Tad Santel,c'hwi ho-peus greet an dén gwaz ha maouez ,  
evid beza ho poltred beo,o-daou unanet a gorv hag a galon,  
hag evid kas da benn,dorn-ha-dorn,al labour o-deus da ober er bed.

48

B) Aotrou Doue,evid diskleria soñjezonou ho kras madelezuz,  
ho-peus c'hoanteet e vefe ar garantez etre gwaz ha maouez  
ar merk a ro da gompren al liamm a zo etrezoh-c'hwi hag ho pobl;  
kaerroh c'hoaz,en eur zevel Sakramant ar Briedelez,  
e rit deom,dre an unaniez etre ar priejou,  
kompren unaniez dispar or Zalver Jezuz Krist hag an Iliz e bried.

49

Ho pedi a reom da venniga ar priejou-mañ ha da rei dezo ho skcozell.  
Keid ha ma vevint an eil gand egile,penn-da-benn o buez santelleet  
dre ar zakramant-mañ,grit ma res evint an eil dre egile ar hras euz ho karantez  
ha ma vezint o-daou nemed eur spered hag eur galon hebken.

O zikourit, Aotrou Doue, da hounid bara d'o ziegez diwar goust o labour,  
da zevel o bugale hervez an Aviel, e doare ma vo kresket ganto ho famill da viken.

D' ho servicherez N... roit heb muzul ho pennoz, evid ma vo pried ha mamm vad  
ha ma vo bepred joa he zud ha levenez he ziegez.

Taolit ivez ho pennoz war N... (an den nevez), dezañ da gaoud kalon ha nerz bepred  
evid beza pried fidel ha tad aketuz.

P'emañt o vond bremañ da gemer perz en ho pred santel,  
heñchit anezo o-daou, a-dreuz buez ar bed- mañ, da vond d'azeza ouz ho  
taol en ho Rouantelez. Dre or Salver Jezuz Krist. AMEN !

(ma n'emañt ket e soñj komunia, echui evel-henn:)

Ha roit dezo, o-daou, Tad Santel, ar joa da vond eun dervez en ho  
Rouantelez. Dre or Zalver Jezuz Krist. AMEN !

## DOARE 2

50

Pedom Doue, ma breudeur ha ma hoarezed kristen, ma plijo gantañ skuilla e hras hag  
e vennoz war an daou bried nevez-mañ, unanet en or Zalver, dre liamm santel ar Briede-  
delez. (chom sioul eur pennadig, dibaba e heller etre ar pennadoù A) B) C)

52

A ) Doue oll-halloudeg, c'hwi ho-peus krouet peb tra dre ho kalloud  
hag ho-peus, azaleg ar penn kenta, laket ar bed da drei hervez ho furnez,  
greet ho-peus an den heñvel ouzoh, ha d'ar gwaz ho-peus roet ar vaouez  
evid e zikour ha chom gantañ heb disparti: greet ho-peus anezo o-daou unanhebkñ,  
o teski deom erelse ne dleer morse dispartia ar pezh 'zo bet unanet ganeoh.

53

B ) Aotrou Doue, c'hwi ho-peus santelleet ar Briedelez dre eur Zakramant ken kaer,  
n'ho-peus diskouezet, en unaniez ar priejou, eur skeudenn euz an hini zo etre or  
Zalver hag an Iliz.

54

C ) Aotrou Doue, c'hwi eo a laka unanet ar gwaz hag ar vaouez, ha d'ar briedelez  
e roit ho pennoz, ar vennoz n'eus nemeti ha n'eo ket bet lamet kuit  
gand kastiz ar pehed kenta, na kennebeud gand diroll an dour-beuz.

(ar peurrest a zo da lavared heb dibaba)

55

Taolit eta ho sellou madelezuz war ho servichérez (war ar wreg nevez),  
a zo amañ o houlenn eviti, dre ho pennoz, kement mad a zo.

Ra vo enni douster ar peoh ha karantez tener,  
ra gerzo war roudou ar merhed santel.

He fried ra lako enni e vrasa fiziañs; ra zoñjo ervad eo-hi par dezañ  
hag he-deus, a-unan gantañ, gras ha galloud da rei ar vuez:

ablamour da-ze, ra vo leun a zoujañs eviti,  
gand eur garantez a denno da garantez or Zalver evid an Iliz.

Aotrou Doue, ho pedi a reom eta: roit ho kras d'ar priejou nevez,  
evid beza stard er feiz hag en ho lezenn, fidel bepred an eil d'egile,  
kaer o buez dirag an oll;

Lakit en ho halonov nerz an Aviel, evid ma vint e-touez an dud gvir destou da Jezuz Krist.

(Roit dezo ar joa da gaoud bugale, evid o zevel euz ar gwella,  
ra welint o bugale vihan beteg an trede hag ar pevare rumm.)

War-lerh buez hir hag eüruz ar bed-mañ, grit dezo digemer vad e-touez ho Sent er Baradoz. Dre Or Zalver Jezuz Krist. AMEN !

### Doare III

56, 57, 58

Pedom an Aotrou Doue, ma breudeur kër, da venniga ar priejou nevez-mañ,  
en eur zila nerz ho kras er halonov unanet gantañ er Briedelez.

(eur pennadig e chomer sioul da bedi)

Tad Santel, Krouer ar béd, c'hwi an hini ho-peus greet an dén, gwaz ha maouez,  
heñvel ouzoh, hag ho-peus savet ar Briedelez d'o unani dindan ho pennoz,  
a galon izel, ho pedom evid ho servichérez N...ar wreg nevez a 'n en ro, hirio,  
dre Zakramant ar Briedelez, d'ar gwaz dibabet ganti.

Skuillit ho pennoz warni ha war an dén a lakit en he hichen 'hed ar vuez.

Grit ma vint eüruz o-daou dre an unaniez etrezo.

(ha ma teuo bugale da laouenaad o zi,  
en eur greski hoh Iliz, famill ar gristenien)

Pa c'hoarzo outo ar vuez, dezo da gaoud soñj d'ho trugarekaad,

pa vo tro an dristidigez, dezo da houlenn sikour diganeoh.

Ra vezint sikouret en o labour gand ar zoñj emaoñ ganto;

deoh neuze da skañvaad o zamm.

Dezo c'hoaz da gemer perz e pedennou an Iliz hag evel-se da veza testou

deoh e-touez an dud. Ha goude eur vuez hir hag eüruz,

roit dezo ar hras da vond en ho Rouantelez. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

### Doare IV

59 (da veza implijet mar demañ ar priejou nevez e soñj komunia)

Va breudeur, goulennom digand Doue taoler e vennoz war ar priejou nevez-mañ,

a zo o vond da reseo asamblez Korv ha Gwad or Zalver Jezuz Krist.

Aotrou Doue, galvet ho-peus dre o ano N...ha N... evid ma teuint da veza eur horv

hag eur spered hebken, en eur en em rei an eil d'egile er Briedelez.

Roit dezo Korv ho Mab, a vo greet dreizañ o unaniez.

Ahanoh eo e teu o harantez ha C'hwi eo ho-peus lakeet erno ar c'hoant a eürusted

a verv en o haloncu. Roit dezo Gwad ho Mab, a zantellay o harantez hag o levenez.

O reseo ar Bara a Vuez ha Kalirad ar Zilvidigez, dezo da zeski:

rei o buez da zikour ar re all,

sevel fidel d'an Aviel ar vugale, fñ buez o harantez,

klask araog peb tra Rouantelez Doue hag e Justis,

renta servij d'ar bed ma vevint ennañ,

beza digor o halon d'an dud ezormeg,

beza atao troet d'ho trugarekaad,

ha dond aliez da renevezi o harantez, en eur reseo asamblez Korv Jezuz Krist Savet

da veo ←

Drezañ eo e pedom ahanoh, peogwir e-neus santelleet eured Kana ha santelleet hoh  
 Iliz en eur vervel eviti. Ni a oar ema Jezuz Krist o pedi dirazoh evid or mignoned  
 N...ha N..., hirio, warhoaz, a-hed o buez ha da viken. Amen !

Doare V (evid eun eured heb overenn, pe c'hoaz pa vez unan euz ar priedjou badez-  
 et, med n'eo ket katolik)

Aotrou Doue, C'hwi ho-peus krouet ar bed ha peb tra ennañ,

greet ho-peus ar gwaz hag ar vaouez heñvel ouzoh

hag evid ma kemerfent perz en ho labour a garantez,

ho-peus roet dezo eur galon gouest da gared.

Plijet<sup>eo</sup> ganeoh e teufe, hirio N...hag N... en Iliz-mañ, da unani o buez,

C'hoant ho-peus bremañ e teufent da zevel o ziegez d'o zro  
 ha da boania d'en em gared an eil egile muooh-mui bemdez

ha da gerzed war roudou or Zalver, En hag e-neus karet an dud,

beteg mervel evito war ar groaz.

Skuillit ho pennoz warno, roit gwarez ha nerz da garantez ar priedjou nevez-mañ:

ra zeuy o harantez d'o zikour da jom fidel an eil d'egile

hag evel-se da rei dezo eürusted, da rei dezo ivez da anaoud (e Jezuz Krist)

ar joa a vez kavet oh en em rei penn-da-benn d'an hini a garer.

O harantez heñvel ouz hoh-hini, Aotrou, ra vezo evito eur varmenn a vuez.

Poulzet gand ar garantez-se, ra vezint atao prest da zikour o breudeur

ha ra vezo o ziegez digor d'an nesa.

Harpet gand o harantez (ha war garantez an Aotrou Krist)

ra boagnint kaloneg da zevel eur bed a vo ennañ muoh a justis hag a garantez

etre an dud, ma vezint evel-se aketuz d'o devezriou a dud (hag a gristenien)

Amen!

(er Zakramant ar Briedelez heb overenn, e vez lavar-  
 et amañ ar Bedenn evid ezormou an oll hag e ro ar  
 beleg e vennoz)

PEDENN GOUDE AR GOMUNION

(unan pe unan da zibaba)

78

1/ Aotrou Doue, dre hras ar Zakrifis hon-eus kinniget,

plijet ganeoh rei bepred ho skoazell d'ar Briedelez savet gand ho madelez.

Evel-se ar re ho-peus unanet dre Zakramant ar Briedelez

ha maget gand ar memez Bara hag ar memez Kalirad,

grit ma vint bepred unanet er garantez. Dre Jezuz Krist, or Zalver

Amen !

79

2/ Aotrou Doue, ho edi a reom, ni hag on-eus resevet ouz ho taol Bara ar zakramant,

plijet ganeoh rei da N...ha da N...hag o-deus en em roet an eil d'egile e Sakra-

mant ar Briedelez, ar hras da jom bepred fidel deoh ha da rei da anaoud hoh ano

d'an dud. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen !

80

3/ Aotrou Doue oll-halloudeg, ho pedi a reom,

grit ma welo ar priedjou nevez-mañ grasou ar Briedelez, o-deus resevet

o vond bepred war gaeraad en o buez.

Grit c'hoaz ma teuo peb-hini ahanon da reseo frouez Sakramant an Aoter,

emac'h o paouez kinnig, dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen !

Echu ar bedenn goude ar gomunion, e lavar ar beleg: An Aotrou Doue ganeoh ! hag e ro e vennoz d'ar priejou nevez. Kemer a heller tamm pe darr euz ar pedennou a zo amañ warlerh.

61-62

Doare I

a) An Aotrou Doue d'ho telher unanet er garantez an eil evid egile; da lakaad dangreski ar garantez-se a zo deuet ennoh digantañ.

b) Ra vennigo ho ti en eur rei deoh bugale; ar re-mañ da rei deoh en distro ken braz levenez ha m'o-devo bet diganeoh.

c) Peoh or Zalver Jezuz Krist ra vo o chom en ho ti, heb ehana morse da rén etrezoh ho-taou.

d) Ho labour d'an eil ha d'egile ra vo benniget, heb na viot gwasket gand trubuillou dreist ho nerz, na pelleet diouz Doue gand beza re eüruz hervez ar bed.

e) Ra vo gwir vignoned endro deoh, da veza laouen da heul ho levenez ha d'ho kennerza en ho poaniou.

f) Ra gavo peb dén glaharet pe enkrezet sikour vad ha frealzidigez (pe:konfort) en ho kichen.

g) Ra vo ho ti, ha peb-hini ahanoh, prest da renta servij, prim da gompren ha da zelaou goulennoh ho predeur.

h) Gras deoh da veza heñchet gand an Aotrou Doue 'hed ho puez, ha da gaoud digemer vad en e Rouantelez da viken.

da echui: N...hag N..., ha c'hwi oll a zo amañ,

Doue oll-halloudeg d'ho penniga,  
an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel.

Amen!

63

Doare II

a) Aotrou Doue, taolit eur zell madelezuz war ar priejou nevez-mañ, ha skuillit warno ho pennoziou kaerra.

b) Ra vo gwir garantez d'o unani kenetrezo, dezo da vale dorn-ha-dorn war hent ar zantelez.

c) Eveldoh, Tad Krouer ha mammenn a vuez, grit m'o-devo levenez o kaoud bugale hag o lakaad o foañ d'o zével.

d) Grit ma vevint hervez ar justis hag ar garantez, evid diiskouez ho sklerijenn d'an dud a zo ouz ho klask.

e) Grit ma vint o-daou prest da renta servij ha d'ober vad, digor ho spered hag o halon da heulennou o bredeur.

f) Ra gresko nerz o halon a-dreuz poan ha levenez ar vuez, evid ma vint testou mad da wirionez an Aviel.

g) Roit dezo buez hir, didrubuill ha yah, ha bennigit labouriou an eil hag egile.



h) Grit ma vint laoueneet gand o bugale o tond braz,  
ma kavint harp ha skoazell, e diabarz eun tiegez euruz

i) Grit dezo digouezoud erfin, da heul ar re zo bet en o raog,  
en ho Rouantelez, ar Baradoz, 'leh ma ne varvo ket o harantez.

j) N...ha N..., ha c'hwi oll 'zo amañ,  
Doue oll-halloudeg d'ho penniga,  
an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.

Amen !

Kerzit e peoh or Zalver ! Bennoz da Zoue !

Doare III (stumm berreet euz an diou all)

64

An Aotrou d'ho telher unanet ho-taou er wir garantez.  
Bezit benniget en ho pugale,

ha ra vo peoh or Zalver o chom en ho ti ha kenetrezh.  
Ho labour dech ho-taou ra vo benniget,

Ra vo gwir vignoned en-dro dech,  
ha c'hwi, bezit digor ho kalon, prest da renta servij d'an dud,  
prim da gompren ha da zelaou goulennoù ho predeur.

Gras dech da veza heñchet gand an Aotrou Doue 'hed ho puez,  
ha da gaoud digemer vad en e Rouantelez da viken.

N...ha N...ha c'hwi oll a zo amañ,  
Doue oll-halloudeg d'ho penniga,  
an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel.

Amen !

\*\*\*\*\*

L I D O U S A K R A M A N T A R B R I E D E L E Z  
P A N E V E Z K E T A O V E R E N N

Lid an degemer a vo greet evel evid an eured gand overenn nemed hag eun abeg,  
bennag a vefe da jom heb henn ober.

Evel-se, hed-a-hed, azaleg ar penn-kenta betek an niverenn 40 gand "Pedenn ar  
priejou nevez".

- On Tad hag a zo en Neñv...

Dioustu goude:

- Bennoz ar beleg d'ar priejou nevez, hervez ar pennadoù I - II - III pe V a gaver  
er niverennoù 50 ha warlerh.

- Pedenn evid ezommou an oll, en eur zihaba ar pezh a zere ar gwella ouz ar priejou  
nevez hag an dud a zo ouz o heul.

- Da echui e lavar dioustu ar beleg ar bedenn a vennoz da gloza.  
Gweled niverennoù 61, 63, 64.

\*\*\*\*\*

L I D O U S A K R A M A N T A R B R I E D E L E Z  
P A V E Z K A T O L I K U N A N E U Z A N D U D N E V E Z  
H A D I V A D E Z E G I L E .

I/ Lid an degemer: Va mignoned, c'hwi a zo deuet en iliz-mañ da veza eureujet;  
c'hoant ho-peus e vefe siellet ho karantez, merket evid atao gand  
eur zin sakr a-berz Doue, dirag ar beleg ha dirag ho tud. Ho ka-  
rantez a vo kennerzet hag ho sikouro da jom atao fidel an eil  
d'egile ha da zougen asamblez kaloneg ar garg a zeu da heul ar  
briedelez.

( bez e heller ivez sevel eun dra bennag all diwar ar pezh a gaver en niverennou IO - I3)

2/- Lid ar gomz: ( a heller da verraad diouz ma vo.  
gweled ar pezh a lavarom diwar-benn lid ar gomz)

3/ Lid ar Zakramant.

Evel kustum, en eur daoler evez da jom heb feuki an hini divadez.

- Diviz kenta , diwar an niverennou 2I- 24
- An asant: N° 28-29
- Siell an Iliz N° 3I-33
- Bennigadenn ar gwalennou-eured ( a hell chom heb beza greet diouz ma vez )
- On Tad hag a zo en Neñv ( ma kred deoh e heller henn lavared)
- Ar beleg a vennig ar priejou nevez (unan pe unan euz ar pedennou a gaver en niverennou 50 ha warlerh)
- Pedenn evid ezommou an oll hag ar vennigadenn ziweza da echui al lidou.

NOTADENN : Awechou, evid eun abeg a bouez e vefe awalh d'ar priejou rei o asant an eil d'egile. Med an asant-se a dle atao beza goulennet ha resevet gand ar beleg.

---

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

...the ... of the ...

XXXI ed SUL VAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,  
dre ho kras eo e hell ho tud fidel ho servicha ervad;  
grit deom eta korzed founnuz hag heb koeza,  
war an hent a gas d'ar madou ho-peus prometet.

Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

Amen!

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vo ar Zakrifis-mañ,  
evidoh eur brovadenn divlam,  
hag evidom eur varmenn a hrasou diwar ho madelez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Ni ho ped, Aotrou Doue, da greski ennom  
labour ho kras evid santellaad or buez;  
maget er Zakramant gand ar Bara euz an Neñv,  
ra vim lakeet muih-mui e stad da hounid an eürusted,  
en-eus ennañ ar bromesa hag an tañva.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen!

XXXII ed SUL VAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,  
pellait diouzom, ni ho ped, kement a vefe a-dreuz d'on hent,  
evid ma vezim distrob a gory hag a spered  
hag e stad d'ober a galon vad ho polontez santel.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,  
a oll viskoaz da virviken.

Amen !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler eur zell a vadelez war ar provou-mañ:  
pa 'z eom da ginnig ar Zakrifis gand ar zoñj euz Pasien ho Mab,  
grit ma kemerim perz ennañ gand oll nerz or halon.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen !

GOUDE AR GOMUNION

Ho drugarekzaad a reom, Aotrou Doue,  
Bremañ p'om bet maget gand ho tonezon zantel;  
ha setu e pedom c'hoaz ho madelez:  
war an dud a zo silet enno eun nerz nevez euz an Neñv,  
skuillit ho Spered Santel, evid ma talhint da vev e stad a hras.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

Amen !

XXXIIId SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Grit deom, ni ho ped, Aotrou Doue, beza laouen bepred ouz ho servicha a wir galon, peogwir n'eus na kaerrioh na padusoh eürusted evidom eged servicha dalhmad Krouer an oll vadou. Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered glan, a oll viskoaz da virviken. Amen!

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, sellad ouz ar provou-mañ kinniget d'ho kloar, evid ma teuo deom, drezo, ar hras da jom fidel deoh ha da hounid an eürusted peurbaduz. Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen!

GOUDE AR GOMUNION

Resevet on-eus, Aotrou Doue, Korv ha Gwad or Zalver, hag izel a galon, ni ho ped: Ar pezh on-eus greet en Overenn gand ar zoñj euz ho Mab, evel m'e-noa lavaret henn ober, ra dalvezo da lakaad or harantez da greski. Dre Jezuz Krist, or Zalver, Amen!

XXXIVed SUL WAR AR BLOAZ - GOUEL AR HRIST-ROUE

PEDENN AN DIGOR

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, en ho Mab karet, Roue ar bed a-bez, eo fellet deoh adsevel hag unani an oll draou krouet; plijet ganeoh eta, ma vo an oll grouadurien, dieubet euz liammo peb sklavêrêz, douget d'ho servicha laouen ha d'ho meuli da viken. Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz da virviken. Amen!

WAR AR PROVOU

En eur ginnig deoh amañ, Aotrou Doue, ar Zakrifis a laka gouenn an dud da gaoud adarre ho pech, e houlennom gand doujañs ma roio ho Mab e-unan d'an oll boblou, ar hras da veza unanet ha da gaoud ar pech. Dre Jezuz Krist, or Zalver. Amen!

PREFAS

E gwirionez, just ha santel eo ho trugarekaad, / e peb leh, hag e peb amzer, / C'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel. /

C'hwi ho-peus sakret ho Mab Unganet, or Zalver Jezuz Krist, Beleg da viken ha Roue ar bed: / evel beleg e-noa d'en em ginnig e Sakrifis war Aoter ar Groaz, evid peurechui ober ho polontez ha prena an dud;

evel Roue, goude beza lakad da blega dezañ an oll draou krouet, e-neus da lakaad etre ho taeuarn, c'hwi an Doue braz-meurbed, ar Rouantelez, n'euz fin ebed dezi:

hini ar Wirionez hag ar Vuez, hini ar Hras hag ar Zantelez,  
hini ar Justis, ar Pech hag ar Garantez.

Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent, e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon...

GOUDE AR GOMUNION

Resevet ganeom magadur ar Vuez Peurbaduz, ni ho ped gand fiziañz, Aotrou Doue, ni hag a zo eun enor evidom senti da lezenn an Aotrou Krist, Roue ar Bed a-bez, ra vim gantañ, e Rouantelez ar Baradoz, beo hag eüruz da viken.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

Amen!

Hirvoud an dud en harlusalm I36

E kichen da steriou ni a oa azezet,  
Babylon, hag eno on daelou zo kouezet  
o soñjal e Sion.

Hag ar re on dalhe e-kreiz or chadennoù,  
a lavare deom: " Kanit kanaouennoù,  
eur hantig a Sion !"

Penaos e yafem-ni en harlu da gana,  
en enor da Yahwe, p'emaom oll o ouela,  
ken pell euz a Sion ?

Ra sklase vadaouarn. Kerkent ouz va stammioù  
ra vo staget va zeod, ma tilez va soñjou  
va bro Jeruzalem !

E va halon bepred e chomo da genta  
da viken e vezo euz a-bell ar haera  
va bro Jeruzalem.

Benniget an hini a ray dit paea ker,  
eun deiz, da dorfejou euzuz en hor heñver,  
merh daonet Babylon !

Eüruz an hini a freuzo da dourioù,  
a hello bruzuna penn da vugaligou  
ouz ar vein, Babylon !

salm I37

Me fell din ho kana dirag an doueou,  
va selaouet ho-peus, sonit 'ta binvicu !

Dirag ho Templ Santel, me 'stouo, me 'veulo  
euz a-greiz va halon, o Doue, hoh ano !

C'hwi 'zo mad ha leal, a zalh ho promesa,  
n'eus par dech e neb lek ! C'hwi 'zo ar brudeta !

Pa 'z on eet d'ho pedi, c'hwi'peus va selaouet;  
nerz va halon kerkent ganeoh 'zo bet kresket.

C'hwi a vezo neulet gand an dud gallouduz,  
p'o devezo klevet ho komzou sebezuz.

Ha meuli a raint oll hoh oberou neuze:  
" Pegen braz, emezo, eo da hloar, o Yahwe !"

Va Doue 'zo uhel, med an oll dud izel  
a blij dezañ, muioh eget ar re uhel !

Pa vezan en anken, c'hwi 'ro din levenez,  
eneb va enebour, c'hwi 'zifenn va buez !

Doue a beurhraio ar pezh e-neus boulhet:  
O! na zilezit ket ar pezh ho-peus krouet !

## salm 140

O Yahwe, me ho ped. Ennoh em eus fiziañs,  
na rit ket d'am goulenn skouarn vouzar, Doue!  
Ra zavo va fedenn, 'vel ma sav an ezanz:  
me 'astenn va daouarn en noz war-du an neñv.

Diwallit va zeod, dalhit va muzellou  
ha mirit va halon eus a beb nemnoz fall.  
Grit din atao tehoud diouz tud an dizurziou!  
Euz an droug, o Doue, me ho ped d'am diwall!

Pa deueot, c'hwi da skei, Doue, me a zento.  
Ma skoit a-nevez! 'vel eul louzou huez vad,  
ya! m'hen digemero ! Med me a eneb  
gand va fedenn, va nerz, euz a beb droug dalhmad!

## salm 144

Me fell din, o Doue,  
benniga hoh Ano!  
Euz an noz d'ar beure,  
bemdez, me ho meulo!

Doue zo braz-kenañ  
hag e oll oberou  
zo testeni dezañ  
e-touez ar boblou.

Oll boblou an douar,  
O Doue gallouduz!  
a embann ho kloar,  
ho labour sebezuz!

Kana 'reont ho kalon,  
karget a garantez.  
Ho lealded gwirion  
a ra o levenez.

Evid tud an douar,  
C'hwi 'zo trugarezuz.  
Na dit ket e kounnar,  
Doue madelezuz !

C'hwi 'zo mad 'vit an oll,  
ho kalon 'zo tener.  
Na lezit ket da goll  
ho labour a Grouer!

An douar ho meulo  
ha ni, ho tud fidel,  
bemdez ho pennigo  
gand hor gwerziou santel.

Ni 'gano ho kloar,  
en ho rouantelez  
hag ho kalloud dispar,  
Doue a vadelez!

Oll vugale mab-den  
anavezo neuze  
ha kalloud da viken  
hag ho kloar, Doue !

Doue a zalh d'e hér,  
en e oll lavariou.  
E peb leh e weler  
kaerder e oberou.

Dond a ra da zikour  
ar re a venn koueza  
ha pa bleg re ar skourr  
e teu d'hen digamma !

salm 65

Kanit gand levenez, oll boblou an douar !  
Kanit Ano Doue ! Embannit e hloar,  
lavarit da Zoue : " Nag eo kaer ho labour !"   
Fa dirazoh e kren, e pleg peb enebour.  
Fa stouo dirazoh an douar, ra gano  
meuleudi da Zoue ! Meuleudi d'e Ano ! "  
Diredit da welout oberiou hon Doue !  
Nag a draou souezuz evid or bugale !  
Ar mor en-eus lakaet eun deiz da galedi  
hag ar ster da zeha ! O ! dezañ meuleudi !  
Ren a ra da viken, rag eñ 'zo gallouduz.  
An dud fall dre ar bed a jomo mud, mezuz.  
Poblou euz ar bed-oll, bennigit an Aotrou !  
Kanit . hag azkanit ho kaera kantikou !

salm 79

Pastor mad Izrael, klevit hor pedennou,  
c'hwi hag a ren ho pobl, an elez, an neñvou !  
Deuit daved Efraim, Benjamin, Manasse !  
Diskouezit ho kalloud ! Savetai on ene !

Grit deom en em zevel, o Doue gallouduz  
ha kerzoud en ho sked gand eur galon nerzuz,  
Doue an armeou, dilezit ho kounnar !  
Klevit pedenn ho pobl o tond euz an douar !

Roet ho-peus dezañ da zebri, o Aotrou  
bara 'zo bet glebiet gant eleiz a zaelou.  
Roet ho-peus d'ho pobl, o Doue, da eva  
daelou, atao daelou ! Diredit d'o seha !

Ar vroiou a beb tu, gand on enebourien,  
o deus or goapaet, dre m'edom en anken.  
Doue an armeou, deuit d'on dieubi !  
Diskouezit ho kalloud evid or savetei !

salm 30

Dacoulagad peb hini  
a zav leun a fiziañs.  
C'hwi a vernig o zi,  
a ro dezo bevañz.

Ho torn a zigorit !  
An oll draou o veva,  
er bed-mañ a vagit,  
heb dilezel netra !

Doue a zo leal  
en e oll lavarou.  
Doue a zo feal  
en e oll oberou.



Bepred e selacuo  
ar re a zo fidel.  
Bepred e skoazello  
ar halonou santel.

An neb a gar Doue  
a vezo selaouet.  
Ar re, glan o ene,  
a vezo oll salvet.

Rag Doue a zivall  
ar re a zo fidel.  
Med ar re a zo fall  
a lezo da verval.

Me 'gan ho meuleudi,  
bemdez, e va fedenn.  
Ra deuiio d'ho meuli  
an oll dud da viken!

salm 22

Doue eo va fastor,  
a bourchas din a' peb tra  
ha pa vez re a hor  
am has da zisheolia!

Ar peuri a zo glaz  
ha druz en en e brajou.  
An dour a red yen-sklaz,  
en hañv, er feunteunio.

Eñ a vag va ene,  
gand ar gwella bevañz,  
Me a veul va Doue;  
ennañ em eus fiziañz.

E-kreiz an noz zoken,  
n'em-eus aon rag netra.  
Eñ 'zo e. va hichenn,  
gand e vaz, en e zav.

Eñ a deu d'am maga  
dirag va enebour.  
Ne ziouer din netra,  
gand e galon acour!

Nag e vin eüruz,  
oll epad va buez,  
Doue madelezuz,  
va dalhit en ho lez!

salm 79

War-du ennoh, me a zav va ene!  
Ennoh em-eus fiziañz, va selaouit, Doue!

Arabad e teufe enebourien garo  
d'ober goap ahanon, leun a fouge enno.

O, nann! hini ebed euz ar re ho pedo  
ne vezo dilezet. Ar re all a baeo!

Yahwe,c'hwi 'raio din anaoud an hent gwirion,  
bale er wirionez!Renit mad va halon!

Rag c'hwi 'zo an Doue a deu d'am savetei;  
gand aked me 'dremen an deiz ouz ho pedi.

Dalhit soñj,o Doue,euz hoh oll trugarez;  
da viken e chomo puill-meur ho madelez!

Ankounahait buan pehed va yaouankiz  
ha va oll fehejou. N'oh ket eun Doue kriz !

C'hwi 'zo trugarezuz! Bezit truez ouzin,  
dalhit soñj ahanon! Doue,pardonit din!

Doue zo mad,leal! Diskouez a ra an hent  
d'ar re oll o-deus keuz da veza bet dizent.

D'ar halonou izel e tesk ar wirionez  
ha dezo e tiskouez henchou ar zantelez.

Oll henchou an Aotrou 'zo leun a goantiri  
evid ar re o. heul dalkmad en eur bedi.

Me 'ra euz va gwella;leal eo va henchou.  
Ennoh em-eus fiziañz,torrit va chadennou!

Euz an oll ankeniou,dieubit Israel,  
o Doue peurbaduz! Doue mad ha santel!

Va fehed a zo braz! Pardonet e vezo  
ha me 'veulo neuze,o Doue,hoh ano!

An den e-neus doujañz evidoh,o Doue,  
a gavo an hent mad evid ren e ene.

E galon 'vo e peoh,en eurvad peurbaduz,  
e vugale o-do ar vro hag eost founnuz!

Karantez on Doue a ya d'ar re a zent;  
e vennoz 'zo ganto dre ma kerzont en hent.

Va daoulagad a dro bepred war-zu Doue.  
Eñ a deuio eun deiz,da derri va ene.

Troit war-du ennon,va Doue,ho sellou!  
Me a zo va-unan,o ouela em foaniou.

Truez ouz va halon,ouz va ene brevet!  
Na braz eo va anken! Tennit kuit va fehed!

War va zro 'z eus tud fall,goapauz,diniver,  
leun int a gasoni! Ha me 'zo ken dister !

Diwallit va ene! Deuit d'am dicubi !  
Ennoh em eus fiziañz ! Deuit d'am frealzi !

salm 16

Selaquit,oYahwe,ar bedenn a gasan  
davedoh! Bezit mad ! Va homzou 'zo gwirion.  
Gand oll nerz va ene,va Doue,ho pedan!  
Va selaquit ,Aotrou! Sellit e va halon!

Dond a hellit en noz, evid sellout enni.  
 Ne gavot netra fall, Doue, e va halon!  
 N'em-eus greet netra morse nemed senti  
 ouz ho Lezenn zantel. Atao on bet gwirion!

Me am-eus baleet, Doue, dre hoh henchou  
 heb argila morse! Me ho ped, selaouit  
 va fedenn, o Doue! Digorit ho skouarniou!  
 Selaouit va goulen! Biken n'am dilezit!

Diskouezit ez oh mad! Euz o enebourien  
 c'hwi zieub oll ar re o deus ennoh fiziañz!  
 Evel mah ho lagad, plijet deoh va difenn  
 euz an dud fall a daol warnom o dismegañz!

O homzou zo dicheg, o halon didruez,  
 war va lerh a beb tu, ne glaskont ken eun dra;  
 va leda d'an douar, 'vel leoned gouez;  
 dre an drez hag ar spenn e klaskont va zaga.

Savit 'ta, o Doue! Deuit 'ta davetañ  
 evid e vruzuna, va enebour touet!  
 Evid va dieubi euz a dud ar bed-mañ,  
 lorch enno gand madou ho-peus dezo roet.

O familhou o-deus peadra da veva  
 ha lezel a hellont d'o bugale danvez.  
 Me a houlenn hebken ho kveloud o para,  
 pa zihunin, Doue! Ho sked 'vo va buez!

salm 85

Selaouit, o Doue, pedenn ho servicher!  
 Me a zo er loan, eun den paour ha distar,  
 diwallit va buez! Me a gar ho pedi.  
 Ennoh em-eus fiziañz! Deuit d'am savetei!

C'hwi a zo va Doue! Bezit truez ouzin,  
 Doue trugarezuz! 'Hed an deiz ho pedin.  
 Va ene 'zo doaniet! Deuit d'e frealzi!  
 Va halon, o Doue, a gan ho meuleudi!

C'hwi 'zo mad, o Doue, ha leun a drugarez  
 evid ar re ho ped, oh karget a druez.  
 Digorit ho skouarn, Doue, d'am fedennou!  
 Selaouit va nouez, e-kreiz an trubuillou!

N'eus hini par deoh, etre an doueou.  
 Ne gavan e neb feh par d'hoh oll oberiou.  
 Ar broiou bet krouet ganeoh a ziredo,  
 a stouo dirazoh ha d'ho prud a gano.

C'hwi 'zo braz, o Doue, hag a ra burzudou!  
 C'hwi hebken 'zo Doue dreist an oll doueou.  
 Deskit din hoh henchou evid mond gand aked  
 war-du ar wirionez, en ho toujañz bepred.

Me ho meulo, Doue, gand oll nerz va ené!  
 Me 'vrudo hoh ano da viken, o Doue!  
 C'hwi a zo bet ken mad evid ho servicher  
 ha truez ho-peus bet ouzin, paourkez peher!

Doue! tud orgouilluz 'zo savet eneb din,  
tud ha n'ho meulont ket a glask trabaz ouzin.  
Med c'hwi, o va Doue, 'zo leun a vadelez,  
ne dit ket e kounnar. Atao ho-peus truez !

Troit war-du emnon ! Rezit mad em heñver !  
Roit galloud ha nerz d'ho paourkez servicher,  
diskouezit d'an dud fall a glasko va bresa  
emaoh en va hichen, evid va skoazella.

salm 33

Me fell din ho kana, Doue, e peb amzer;  
ho meuli da viken a fell d'ho servicher!

E Yahwe, va halon bepred en em savo,  
tud izel a galon, savit ivez d'ho tro!

Kanom, oll unanet, hon Doue peurbaduz!  
Bennigom @ ano ! En 'zo madelezuz !

Klasket em-eus Yahwe. Me 'zo bet selaouet  
hag euz va oll enkreiz me a zo bet gwalhet.

Sellit, oll, davetañ, c'hwi a vezo lacuen.  
War ho tremm ne vo ket a vez na tamm anken!

An den paour a bedas, Doue her selaouas.  
E boan da viken gand Doue a deuzas.

El Doue zo deuet. E delit em-eus savet  
e-touez an dud vad ! Gantañ int bet salvet.

Gwelit hen ha tarvit ! Doue 'zo mad-kenañ!  
Hag eüruz an den 'zo skoazellet gantañ!

Doue 'zo c-kichen ar re a zo gwasket,  
ar re o deus poan gantañ vo pareet.

Niveruz ar poaniou o deus an dud fidel;  
oll e vezint skubet gand on Doue Santel.

Sentit ouz e vouez, o, c'hwi, oll dud fidel!  
Rag netra ne ziouer d'an enecou santel.

Tud, hizio, gallouduz, o-do naon, a vo paour.  
Ar re a glask Yahwe o deus gwell eged aour.

Deuit, va bugale, selaouit va hentel!  
Me 'zesko deoh senti ouz e lezenn santel.

Piou ahanch a gar, evid gwir ar vuez  
e-neus hoant da veza eürusoh benvez ?

Diwallit ho teod diouz ar fallagriez,  
ho muzellou dalhmad diouz an drubarderez.

Tehit euz a beb droug, grit vad endro deoh  
ha klaskit e pet leh, a beb hent, ar peoh!

Daculagad on Doue 'zo war an dud leal;  
e skouarn 'zo digor atao d'an dud feal.

E-keñver an dud fall ez eo leun a imor,  
evid o bruzuna, 'vid laza o envor.

An dud leal a bed ha Doue a glevo;  
euz an oll ankeniou, eun deiz, o dieubo.

O eskern 'zo dalhet, miret gand on Doue  
hag hini anezo ne vo torret morse.

D'an den fall e teuo dre an drcug ar maro;  
ar re a ra poan d'an den mad a varvo.

Yahwe a ragpreno ene e zujidi  
ha ne gastizo ket neb a gar e bedi.

salm 41

'Vel ma klask eul loen o houezi an dour red,  
me ho klask, va Doue, a beb hent, a beb tu.  
Euz an Doue heo, nag em eus a zehed!  
Me a garfe tañv<sup>a</sup>sked ho kloar dioustu !

Va daelou zo deuet da veza va bevañz;  
'hed an deiz 'hed an noz . " Peleh 'ma da Zoue ?"  
a lavar din an dud. Ennoh em eus fiziañz!  
Digasit ho skoazell da va faourkez ene!

Soñj am-eus, va Doue, ha va halon a gren.  
Gand ar bobl ma 'gerze war-du an Templ Santel.  
Ni 'gane kantikou, a yoube a-bouez penn,  
'vid ho meuli, Doue ! Nag 'oa kaer ar gouel!

Perag e-zout dinerz, o va faourkez ene ?  
Perag en em glemmez, e va breiz, truezuz ?  
Bez fiziañz ! Te 'veulo adarre va Doue.  
En da zalvo eun deiz, rag en 'zo gallouduz!

Soñjal a ra ennoh, va ene gouliet.  
Euz a vro ar Jourdan, Hennon, 'Kenez Mlsar,  
e teu evel oulcu o hrontal, fuloret,  
saillet o deus warnom a-grenn gand o hounnar.

'Bed an deiz, digasit davedon ho skoazell !  
'Bed an noz, e kanin da Zoue meuleudi!  
C'hwi a zo va Doue evel va roh santel!  
Diouz an enebourien deuit d'am dieubi.

Brevet eo va eskern, beb tro ma klevan tud,  
o houlenn diganin: "Petra 'ra da Zoue ?"  
Bepred o hoapaad gand o flemmadou yud;  
va enebourien kriz a glask droug d'am ene.

Perag, o va ene, out ganto 'vel breset ?  
Perag en em glemmez ? Bez fiziañz en Aotrou !  
E veuli 'rin hoaz ! Cantañ e vin salvet!  
Va Doue, diredit da zeha va daelou !